

2.

Quand les blés sous l'orage
 Courbent leurs épis lourds,
 C'est devant ton image,
 Vierge du Bon Secours,
 Que le terrien t'implore
 Pour sauver sa moisson
 Afin que dure encore
 Le pain dans sa maison.

3.

Quand on craint pour la vie
 D'un être bien aimé,
 C'est chacun qui te prie
 Afin qu'il soit sauvé ;
 S'il n'est point de remède
 Et si survient la mort,
 Tu viens vite à son aide
 Pour le conduire au port.



Kantik Sant Yan-Vadezour

DISKAN :

*Embanner bras ar binjen,
 Hirio selaouit hor peden — Sant Yan —
 Karet hoc'h bet gant Hor Zalver,
 C'houi 'zo profet, c'houi 'zo merzer.*

1.

Etouez bugale ar merc'hed
 Biskoaz ne-z-eus ket bet kavet — nikun —
 A ve brasoc'h eget Sant Yan,
 Jezuz hen lavar e unan.

2.

Dre nerz ho mouez eil Elias
 An dezert oll a dregernas — a reas —
 Kalz pec'herien 'deuas d'ar Jourdin
 O skei gant keuz var o feultrin.

3.

Setu Jezuz, Salver ar bed
 O tont da veza badezet — Jezuz —
 En er gren a skuilljoc'h dour
 Var benn ho Mestr, Yan-Vadezour.

4.

Ma krenit dirak Mestr ar bed
 Dirak an dud ne grenit ket, — Sant Yan —
 Tavit, tavit, tud digaloun
 Ar profet bras n'oar ket kaout aoun.

5.

Ama gwechall kaera chapel
 A c'houdore an dud fidel — Sant Yan —
 Diredet euz a dro var dro
 Skuiz maro ar c'halz anezo.

6.

Ar skuizder-ze n'eo ket padus
 En ho kichen, mignon Jezuz — Sant Yan —
 Dour ho feunteun 'dorr ar sec'hed,
 Ha d'an izili 'ro 'r yec'hed.

7.

Skuillit bennoz var bep hini
 'Zo bet hirio ouz ho meuli — Sant Yan —
 En o buez, var o maro
 Kemerit soursi anezo.

Peden da Zant Jaoua

TON : *D'hor Mamm santez Anna.*

DISKAN :

*Sant Jaoua benniget,
 Hor selaouit bepret,
 Mirit, en han' Doue,
 Hor c'horf hag hor ene !*

1.

En hor bro peb kristen
 A lavar hoc'h hano,
 Dreist-holl e Plouvien
 C'huiz 'zo meulet ato.

2.

Ha penoz ne vec'h ket ?
 Plijet eo gant Doue
 E ve bet digaset
 Ho korf d'eomp da leve.

3.

Henor ha meuleudi !
 D'ho relegou santel !
 Kaer e vo d'eomp pedi
 'Vit goulenn ho skoazel.

4.

Ho pennoz, ni ho ped,
 Varnomp, e peb mare !
 Ha roit d'eomp, pa vo red,
 Heol tomm pe gliz an êe !

5.

Tud a zo deut ama
 D'ho kaout, seac'h an amzer,
 Hag o deuz bet gant joa
 Glao-puill d'ho farkeier.

6.

Grit d'eomp epad hor buez
 Beza guir gristenien,
 Ha, gant ho madelez,
 Gounit hor c'hurunen !

Cantique à N.-D. de Plouvien

Refrain :

*C'est toi notre Patronne,
 O Vierge de Plouvien,
 Pour nous sois toujours bonne
 Vrai secours du Chrétien,
 Puissante et tendre Mère,
 Ce sont tous tes enfants
 Qui chantent leur prière
 De tout leur cœur aimant.*

1.

Quand la tempête gronde
 Autour de notre cœur,
 Quand dans la nuit profonde
 Le démon nous fait peur,
 Dame toute puissante
 Etends sur nous ton bras,
 Notre âme plus vaillante
 Vaincra dans le combat.